



Breiz eo atao bro ar pardonioù hag ar gwiskamañchou kaer.

PHOTO JOS LE DOARÉ

BLEUN-BRUG

Niv. 92 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 fr.

EOST - GWENGOLO 1956

TAOLIT EVEZ MAT

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1956 ?

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell d'eoc'h beza ezel eus ar Bleun-Brug pe rei d'eomp skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Arabad eo mouga eur zevenadur, gand V. Fave.....	1
Dasson Bleun-Brug Karnag, gand an Ao. Talec.....	3
Benedicite (diwar ar Gwenedeg)	4
Skol-hañv ar Bleun-Brug	5
Degved bloavez Kelh-Keltieg Lokorn	9
Saout Lambaol : Bouchig, gand Mab an Dig.....	10
Bro-Bortugal hag an Indez, gand J. Cormerais.....	14
Liziri ha Keleier (Y. ar Gow)	15
Pardon ar Zonerien e Gourin	16
D'ar pazig, kan-bale gand P. Treoure.....	17

PRENIT DISKOU BREZONEG

H. WOLF, 6, rue Astor, QUIMPER, Finister,
en-deus savet evidoh

16 pladenn « microsillon » : Bombard ha biniou grand Loeiz ha Marsel Ropars, Per Guillou, Kevrenn St-Malo ha Kevrenn C'hlazig (4 bladenn). — Kantikou brezoneg c'hoaritet war an o graou gand G. Pondaven (1 bladenn). — Kanaouennou gand Zaig Monjarret (3 bladenn). — Mona Kerys (2 bladenn). — Eliane Pronost (1 bladenn). — Kaner an Odet (1 bladenn). — Kan ha Diskan Poullaouen (1 bladenn). — Goueliou Kerne (1 bladenn)

ha dreist-oll **Noz a Gan Bleun-Brug Landi**, gand Laz-Kana an Ao. Abjean (1 bladenn). — **Gwerz maro an Ao. Perrot, Intron Santez Anna** hag **An Diou Vreiz** (1 bladenn) gand Laz-Kana Landi ive.



Er miz a zeu e vo kavet ar c'hendalh euz **Istor ar Bleun-Brug** gand L. Lok, ha roll or **madoberourien** chomet er wech-mañ a-dreuz dre ziouer a blas.

13384A

Arabad eo mouga na lezel da vervel eur zevenadur !



« Setu aze eur pezh kaer avad ha goude ma varvfe ar Brezoneg ha goude ma varvfe ar yezou all keltieg ! N'eus aze nemed eur vouez e-touez kant all, eur vouezig dister... »

Ha koulskoude ez eus sperejou braz a dud hag a lavar e vefe grêt gaou braz ouz mab-dén ma vefe lezet da vervel ar zevenadurioù a apar-chant ouz ar poblou bihan ; **o laza a vefe eun torfed.**

Selaouit 'ta eun dén fur euz Bro-Indez, S. Radhakrichmane :

« **La trace de l'homme est semée des tombes des communautés sans nombre qui eurent une fin prématurée. Mais, est-ce là une justification pour attenter à la vie humaine ? Avons-nous quelque idée de ce que le monde perd lorsqu'une culture raciale s'éteint ? C'est vrai que les Peaux-Rouges n'ont rien apporté en apparence au progrès du monde, mais avons-nous une vue assez claire des possibilités non développées qui, au moment marqué par Dieu, auraient porté leur fruit. Savons-nous assez de choses sur nous, sur le monde et sur les desseins de Dieu pour croire que notre civilisation, nos institutions, nos coutumes sont si incommensurablement supérieures à celles des autres, non seulement à celles qu'ils possèdent en ce moment, mais aussi à celles qu'ils ont en puissance ? Nous ne pouvons mesurer d'avance les possibilités d'une race. Les civilisations ne se font pas en un jour, et si le destin avait été moins dur et nous moins arrogants en notre ignorance, le monde, j'ose le dire, aurait pu être enrichi par la contribution des Peaux-Rouges.** »

(S. Radhakrichmane. « La conception hindoue de la vie. »
Londre 1927, p. 94-95.)

Sevenadur an dud kroc'hen-ruz a zo bet mouget pa n'oa anezi c'hoaz nemed eun dra distum evel m'eo distumm ar vuhez nevez er melen-vi ; evel m'eo distumm eun iliz gaer kouezet en he ' foull. N'eo ket marteze eo, ma vefe bet sikouret da vleunia gand alouberien ar vro, difazi eo en defe pinvidikêt ar bed.

Abaoe m'eo deuet an dud da rei stumm d'o spered, pet a zevenadurioù a zo bet dizehet, pet all siwaz ! a zo bet lazet !

« **An Douar a zo eun neved leun a biledou maro** », a lavare I.-P. Kalloc'h.

Epad miliadou ha miliadou e-neus an dén kerzet en deñvalijenn o klask freuza ar vorenn her groñe, o klask divorza e spered. o klask diframma digand an douar e zekrejou... lod pobladoù a zo êt gorrekoh gand o herzed, lod primoh, hervez an degouezadou. Arabad eo kondaoni da vad ar zevenadurioù n'int ket c'hoaz dinodet kaer, pe deuet war adreñv. Room dezo tro da zougen o 'frouez araog o barn ; marteze e taolint frouez saourusoh eged ar zevenadurioù dispaket abretoh. Buan-noh e teu an halegenn da wezenn eged an dervenn, buannoh e teu ar honiflig da gonifl eged an ebeul da varh. Marteze e oa muioh a zalh

don, muioh a ouestoni kuzet, er zevenaduriou mouget e-kreiz o hresk, eged er re a zo deuet da vad. Gaou a zo grêt ouz Doue hag ouz an dén e-unan ouz o gwasta. Dre hras Doue, ez eus c'hoaz sevenaduriou en o mailhurou ha n'eo ket deuet ar pobladou braz ha pinvidig a-benn da laza ; bez ez eus anezo e Bro-Afrika, er zav-heol tosta ha pella... Piou a oar petra roïnt, eun dervez, ma vezont sikouret ?

Bez 'ez eus sevenaduriou all hag a zo evel dismantrèt, hag a zo bet evel seizet e-kreiz ober o hresk. **Sellit ouz hini ar Gelted ; eur poent 'zo bet e kave deor edo o vond da vleunia ha setu deuet ar mor latineg ha germaneg d'e veuzi re abred. Ne jom nemed dismañtrou er broiou bihan keltieg.** Goude ar brezelioù, wardro an tachennou emgann e weler gwez braz diskaret pe losket gand ar hanolioù ; med setu diwar ar harrenn pe ar wrizienn kreskennou nevez o hlaza hag a zavo da wezenn ma vezont lezet. Setu m'eo bet dismantrèt da vad sevenadur ar yuzevien strewet dre ar béd ; maro pe dost oa o yéz — starta diazeze eur zevenadur... Marteze warhoaz e vo o zro da rei lusk d'ar béd ! **Marteze e vo tro ar Gelted pa vo breinet en o fehed lod euz ar zevenaduriou braz a vremañ.**

Er broiou bet darempredet gand an dud abaoe miliadou araog Hor Zalver, evel e broiou a zav-heol-tosta, e kaver e-kreiz ar c'hompezen-nou, runiou ha n'int ket menezioù debret gand an amzer evel torgennou Breiz, med savet gand an dud a rumm da rumm ; grêt e vez « tell » (tellou) anezo. Ac'hano e teu anioù kêriou evel Tell-Aviv. Emaer staget d'o 'freuza evid klask petra 'zo enno. N'int nemed dismañtrou kêriou kouezet en o 'foull an eil warlerh ebén. Pa veze dismantrèt eur gêriadenn, pe gand tan pe gand brezel, e veze ledet ha plênaet an dismañtrou ha savet eur gêr nevez war horre. Beteg seiz kêr a zo bet kavet evel-se an eil dindan ebén, en hevelep « Tell ». Pep kêr nevez a veze gwintet eun tammig uhellog eged an hini araog hag an dismañtrou diweza, koz-noe lod anezo, goloet a hlazvez, a zo evel runiou.

Ar zevenaduriou a zo bet dem-heñvel o istor, unan a vez mouget, unan all a zav war gorre, sunet ganti awechou ar pep gwella euz an hini genta ; lod a zihun eun dervez goude eur morgousk hir, lod a zizeh war o zreid pe a vez diskaret.

...Piou a hellfe rei da anaoud amzer da zond ar zevenaduriou ? Piou a oar pegen don eo krignet en e ziabarz gand eur preñv kuzet sevenaduriou otusa hon amzer ? **Piou a oar peseurt tan a zo o virvi e kalon ar Vretoned ? Piou a oar peseurt planedenn a vo hini ar Vretoned hervez soñjou Doue !**

Gortozom an eur, dalhom beo an tan en oaled, hepdale marteze e flamino kaer.

V. Favé

darnig euz e brezegenn e skol-hañv Kastell-Paol
21-8-56.



DASSON BLEUN-BRUG karnag

BRO AR VEIN HIR

...Hiniù el én amzer treménet, gelleit e hrer lared é tell pobl er Vretoned, eid chom kritù, um harpein ar dri mén hag e zo mein fondizion er gwir eürusted.

Er hetañ anehé e zo mén en uéled. E-pad er filajeu gouañ, bodet éndro d'ur hoahad tan, hun tud koh e zeverré, hag en tolpedeu kérentaj-sé e hoarne én tié-geheu breizeg en tuemder hag el leuiné.

Bretoned, dihuennom groñs mén en uéled, mén fondizion en tiégeh, éneb d'er modeu digampenn é asé er berhoncin.

Brezelom eid derhel én ou zau, poblet hag unanet, er familleu kristen e zo inour hur Bro...

En Eutru En Danteg, gwéharal person ér barrez-men, en des labouret eid kement-se, é vélein, ged é donieu brudet, en éredenn hag er vuhé a famil.

« Santez Anna, reit dehé peah ged doujañs [Doué.
« Goarnet berped, é peb tiegeh, er ga- [ranté. »

Ur zonenn gaer, toniet getou, e gomz dem ag ur plahig a drihueh vié, plahig hemb avisted e oe bet reit dehi un alhué, alhué en eürusted. Ha chetu hi oët dre ér vro, én hé dorn en alhué, eid klaskein ér bed tro-dro, dor kaer el leuiné.

Ar en hent hir e hélié, pell doh bro en Arvor, ag en eürusted e glaské, ne gavé ket en nor. Med un dé éma degoéhet ged samm er gohni, é-tal un ti hanter goéhet, dilaosket ha gouli. Ged en alhué é tigoras dor en tiig hemb toenn, hag ar en uéled é huélas léh hé havellig gwenn...

Eid kristenion, én es, neoah, ur mén talvoudusoh hoah eid mén en uéled. Er mén burhuduz-sen e stag unan doh en all en inéaneu badeet, tolpet om, mem bredér, éndro dehou é-pad en overennmen : **Mén en aoter**, er zantellañ e zo ér bed. Distaget azoh er mané kalvar, arnehou é vé reneuéet hemb arzau en Aberh, er Sakrifis braz en-des hur salvet.

E-tal er mein hir stretet ker stank ar er mezeu tro-dro, hun tud koh o-dés hadet er groez, penn-der-benn d'en henteu e hélient eid santellaad doar en Arvor ha merchein d'ou bugalé er vinotenn e gas d'en Néañ.

Eid derhel leh tauleu-mein er bañaned, ruet ged goed en dud pe el loned, kavet e vé é peb iliz hag e kement chapel én hur bro, er mén **Aoter**, mén er gwir sakrifis e zégas dem goed hun Zalver skullet ar er groez.

« O doustér en overenneu én ur chapel,
« Ur chapelig didrouz e mézeu Breiz-Izel... »

...Hirio 'vel en amzer dremenet, gelloud a reer lavared e tle pobl ar Vretoned, evid chom kreñv, en em harpa war dri mén hag a zo mein fondasion ar wir eürusted.

Ar henta anezo eo mén en oaled. E-pad ar filajeu goañv, bodet en-dro d'ur hoahad tan, hon tud koz a zeverre, hag ar bodadegou kérentaj-se a hoarne en tié-geziou breizeg an domder hag al levenez.

Bretoned, divennom groñs mén en oaled, mén diazeze an tiegez, éneb d'ar modeu digampenn a ésa her bruzuna.

Brezelom evid derhel en o 'zao, poblet hag unanet, ar famillou kristen a zo enor hor bro...

An Aotrou An Danteg, gwechall person ar barrez-mañ, e-neus labouret evid kement-se, o veuli gand e doniou brudet an eured hag ar vuhez a famil.

« Santez Anna, roit dezo peoh gand doujañs Doue.
« Goarnit bepred, e peb tiegez, ar garante. »

Er zonenn gaer, toniet gantañ, é komz deom euz eur plahig a driveh vloaz, plahig heb avisted, a oe bet roet dezi eun alhouez, alhouez en eürusted. Ha setu hi aet dre ar vro, en he dorn an alhouez, evid klask er bed tro-dro, dor gaer al levenez.

War an hent hir a heulie, peil diouz bro an Arvor, euz an eürusted a glaske, ne gave ket an nor. Med eun deiz éma digouezet gand samm ar gozni, e-tal eun ti hanter gouezet, dilaosket ha goulo. Gand an alhouez e tigoras dor an tiig heb toenn, ha war an oaled e welas leh hé havellig gwenn...

Evid kristenien, ez eus, neoah, eur mén talvoudusoh c'hoaz eged mén an oaled. Ar mén burzudus-se, a stag unan ouz an all an eneo badezet, bodet om, ma breudeur en-dro dezañ e-pad an overennmañ : **Mén an Aoter** ar zantella a zo ér bed. Distaget a-zioh ar Menez-Kalvar, warnezañ e vez renevezet heb arzau an Aberz, ar Sakrifis braz e-neus hor salvet.

E-tal ar vein-hir, strewet ker stank war ar méziou tro-dro, hon tud koz o-deus hadet er groaz, penn-da-benn d'an henchou a heulient evid santellaad douar an Arvor ha merka d'ou bugale ar wenojenn a gas d'an Neñv.

Evid derhel leh taolioù-mein ar bañaned, ruziet gand gwad an dud pe al loned, kavet e vez e peb iliz hag e kement chapel en hor bro, ar mén **Aoter**, mén ar gwir sakrifis a zegas deom gwad hor Zalver skullet war ar groaz.

« O douster an overenneu en eur chapel,
« Eur chapelig didrouz e méziou Breiz-Izel... »

Mar um blijant éndro de vèn en uéled, mèn ou havel; mar karant ou hroezieu hag ou aoterieu mein, er Vreiziz e chom hoah fidel d'ur mèn arall: **mèn-bé** ou zud tremenet.

Rag ni e gred, kristenion, éma deit Hun Zalver a varü da vitü, éma bet gronnet e vé a splannder. Ha pe ligerno un dé én ébr ag en amzér, er groez en des chervijet dehou da féahein er marü, gouled e hram e satü o relegu en dud tremenet a ludu er bé eid bitéin éndro ur vuhé néué ha perbaduz.

« Doar santel en Arvor,
« El ur garnel digor,
« E hoarn eskern hé bugalé,
« Betag en deuhé braz ma rei Doué
 én-dro nerh déhé. »

Kenvroiz ha mignoned ker, n'ankoéham ket éma én-dro da vèn-be ur brogarour greduz, en Eutru En Danteg, en un gavam tolpet amen hiniü. Hed e vuhe, kanet en-des ged ur voéh flour ha dudiuz, gloér en Eutru Doué ha kaerdér Arvor. Saüet en-des tonieu dous ha melkoniuz eid luchennad bugalé Breiz-Izel; tonieu guüü ha skañv eid lakad joé én ou haloneu. Goulenn e hra genem aluzon hur pedenneu eid sekour ged e ineañ beur-arriü é bro en étrüsted.

Pe vo achiü eitou hag eveidom noz tioél er bé, pe splanno én Néañ dé er barn vraz, pe streüo hiaul ar Justis é splannder ar en doar, doned e hrei, e goaskedenn kroez Jezuz, de zihun e vredér én ur ganein dehé en devehañ « **Sau** »...

(Diwar sarmon an **Ao. Talec** e Bleun-Brug Karnag.)

BENEDICITE (DIWAR AR GWENEDEG)

Ben-ni. get va Dou-e ar pred A roit d'ho pu-ga-le ga-ret
Vid ma hel. lint hed o bu-hez Ho ser-vi-cha gand ka-rantez.
En a. no an Tad, hag ar Mab, hag ar Spe. red Glan.
E. vel se be-zet grét.

Va Doue bezit meulet,
V'it ar pred on eus kemeret.

Ni a lavar deoh trugarez
V'it an oll vad a rit bemdez.
(Skol-hañv Kastell-Paol.)

Mar en em blijont en-dro da vèn an oaled, mèn o havel; ma karont o hroezieu hag o aoteriou mein, ar Vreiziz a jom c'hoaz fidel d'eur mèn all: **mèn-bez** o zud tremenet.

Rag ni a gred, kristenion, éma deuet Hor Zalver a varo da veo, éma bet gronnet e vez a splannder. Ha pa lugerno, eun deiz en oabl euz an amzer, ar groaz he-deus servichet dezañ da féza ar maro, gouzoud a reom e savo relegou an dud tremenet euz ludu ar bez evid beva en-dro eur vuhez nevez ha peurbaduz.

« Douar santel an Arvor,
« Vel eur garnel digor,
« A hoarn eskern hé bugalé,
« Beteg an devez braz ma roi Doue
 en-dro nerz deze. »

Kenvroiz ha mignoned ker, n'ankouaom ket eo en-dro da vèn-bez eur brogarour greduz, an Aotrou an Danteg, en em gavom bodet amañ hiriö. A-hed e vuhez, kanet e-neus gand eur vouez flour ha dudiuz, gloar an Aotrou Doue ha kaerdér Arvor. Savet e-neus toniou dous ha melkoniuz evid Iustellad bugale Breiz-Izel; toniou gwiou ha skañv evid lakad joa en o halonou. Goulenn a ra ganeom aluzenn hor pedennou evid sikour e ene da beurerruoud e bro an étrüsted.

Pa echu evitañ hag evidom noz teñval ar bez, pa splanno en Neñv deiz ar varn vraz, pa strewo heol ar Justis e splannder war an douar, dond a raio, e gwasked kroaz Jezuz, da zihun e vreudeur en eur gana dezo an diweza « **Sao** »...

Skol-hañv ar Bleun-Brug

Talvouduz e vo bet hañvez 1956 da Vreiz.

An had taolet a zoug frouez tamm ha tamm.

Gweled on eus Skol-hañv Kendalh e Kastellin euz ar 6 d'ar 27 a viz Eost, evid yaouankizou ar helhiou keltieg hag ar bagadou sonerien: eun 70 bennag a re yaouank bodet.

Bez' ez eus bet c'hoaz kamp brezoneg skouted Bleimor e Landevenneg; kamp ar vrezonegerien e Ploueg-ar-Mor, ha kamp ar skolaerien laik e Santeg.

✱

Ar Bleun-Brug, eñ, e-neus bodet e dud e Kastell-Paol, e skol Sant-Yann-Vadezour, euz an 20 d'ar 27 a viz Eost. Eur sizuniad labour leun a frouez, heuliet penn-da-benn gand war-dro 60 kelenner: frered a bep urz, seurezed e bep liou, beleien, siviled. E darn euz ar prezegennou ez eus bet kontet betég 74 selaouer.

Labour fonnuz ha labour fetiz a zo bet graet. Klevit kentoh:

Da zeiz heur nemed-kart, e veze bodet an dud evid kana e brezoneg ar pedennou diouz ar mintin. An *Aotrou Bourdellès*, kelenner e skolach Lannuon, a roe deom goudeze, e-doug eun hanter heur, aliou ha kenteliou tennet diwar *skouer Sent or Bro*.

Da 7 h. 30, overenn gand pedennou ha kantikou brezoneg.

Goudeze, euz 9 h. 30 da 12 h. 30; euz 14 h. 30 da 19 h. 30 prezegennou ha kôzeadennou gant tud euz an dibab ha n'o deus, hini anezo, grêt goap ouz o zelaouerien.

E-tre 16 h. ha 17 h. 30 e veze koulskoude eun tamm diskrog. Darn a yae da vale tro-war-dro, pe da zouba o zreid en dour war aod Pempoull ha Santez-Anna, pe c'hoaz diwar dosenn Park-an-Aod, da arvesti ouz kaerdér ar vro.

Darn all, avad, a gave gwelloc'h chom er skol da renka o notennoù, da lenn pe da furchal an toullad levriou laket eno e diskouez pe c'hoaz da zelled ouz an tresadennoù, bet grêt da geñver kenstrivadegou-skol ar Bleun-Brug, e Leon hag e Kerne.

Erfin, lod all c'hoaz en em denne en eur hlas all dindan renadur ar Breur *Korantin An Her*, hag eno e veze laket beh war an vombard hag ar biniou.

✱

Diazezet e oa or skol-hañv war al levnevez, ha levnevez a zo bet. Ne vez grêt labour vad nemed pa labourer a galon laouen, o soñjal e strinko on levnevez e kalon ar re all hag e tarzo, eun deiz zokén, beteg dreist treuzou ar bed all. Eno eo éma on nerz deom-ni, kristenien, soñjal e-nevo on labour eun astenn a étrüsted er vuhez ne vo fin ebet dezi.

Goude an devez labour, goude beza kanet ar pedennou diouz an noz ha lennet « *Buhez ar Zent* » e levr an Aotrou Perrot, e veze beilhadenn. Dre ar sinema (1), Breiz en he haerra en em zispake dirazom. Mond a raëm euz an Arvor d'an Argoad, euz ar mor d'ar menez pe euz eur gêr d'ebén da heul ar Bleun-Brug. Gwechou all, teodou distagnellet on lake da c'hoarzin, moueziou flour a zidue on diskouarn; hag on douge, e-pad or housk, e bro an huñvreou kaer.

(1) Filmou bet diskouezet er beilhadegou: *Itiz-Veur Landreger* ha *pardon St-Erwan*, film savet ha prezantet gand an Ao. Bourdellès — *Bleun-Brug Kastell-Paol 1950*, ha *Trovent Lokorn* gand Le Grand euz Kemper — Daou film war *Landevenneg* — *Penn-ar-Bed*, gand Moride, prestet gand ar c'homité dép. du Tour, gand luhskeudennou a l'hou.

Al labour avad eo bet al lodenn wella euz or skol-hañv. Deuet e oam, gand eur galon eün, da labourad war danvez Breiz.

Bez ' on-eus bet. 41 kaozeadenn grêt gand ugent prezeger : an aotrounez beleien *Falc'hun, Favé, Bourdellès, Le Bihan, Seite, Derian*; an Tadou *Laurent* ha *Grégoire*; ar Frered *Uguen, Stephan, Seite, Riou, Cyrille, Le Nair*; an aotrounez *Ar Flem, Lebreton, Tricoire, Guilcher, Duigou, Merdy, Jos Doare*. Tri all a zo bet mired da zond : *Yann ar Minor, B. de Parades* ha *Meriadeg Herrieu*.

41 prezegenn ! Ouspenn 50 heur labour !

Komz euz ar prezegennou ? Méd eur mell levr eo a rankfer neuze da skriva ! Komzet ez eus bet anezou mad gand *Gourvil* en « Ouest-France », hemdez e-doug ar skol-hañv. Taolennet int bet én eun doare dreist gand *J. Le Duigou* er « Progrès » hag er « Courrier ». Bennoz Doué dezo. Anó a vo c'hoaz anezo e meur a gelaouenn all, evel ar « Semaine Religieuse », ar « Sentier ».

An aotrou beleg *Ar Bihan*, aluzenner ar vartoloded, hag aluzenner-meur ar Bleun-Brug eo a zigoras ar skol-hañv dre eur brezegenn dalvouduz a roas deom da houzoud lezenn an Iliz war-zivoud ar hudennou kulturel ha sevenadurel : eun tour-tan eo bet deom ar brezegenn-se. Moullet e vo en he-hed e « Korn-Boud ». Her goulenn a heller diganeom (2).

En deiz warlerh, an Aotrou *Chaloni Favé*, Vikel-Vraz, a skoas c'hoaz war an fach, hag a zigoras deom dre ar « hultur » brezoneg, eun toullad prenestou war ar bed. N'eo ket bihannaad eo a reom pa studiom don or hudennou, méd en em lakaad e stad da gompren gwelloc'h ar re all. Moullet e vo amañ a bennadou, studiadenn gaer an Aotrou Vikel-Vraz.

P'eo digoret an hent deom ken brao, beh bremañ d'al labour ! Penaos komz, avad, evel m'eo dleet, euz kaozeadennou an Aotrounez *Falc'hun* ha *Bourdellès* ?

An *Ao. Bourdellès* eo a vo evel tad on « retred ». Eñ eo a zisplego d'on ene hep mintin, menozioù talvouduz braz : feiz start or Zent koz, karantez or Zent koz, esperañs or Zent koz. Ni, kelennerien, eo heritourien an dud-se o deus stummet eneou or hentadou, o-deus difraostet on dotiarou hag hadet santelez. Deom da valé war o roudou hervez an amzer a vremañ...

An *Ao. Bourdellès* ive eo a lavaro deom hemdez an overenn, hag a ingalo etrezom ar bara a vuhez. Unan euz an overennou a vo lavaret evid an *Aotrou Perrot* hag an *Aotrou Chaloni Batany* a oa bet tad skol-hañv Rosko e 1947.

Kaozeadennou helavar an *Ao. Chaloni Falc'hun*, kelenner e Skol-Veur Roazon, a zo bet, a-dra-zur, mên diazez ar Skol-hañv, eun diazez divrall.

Gouiziegezh an *Ao. Falc'hun* a oa dija anavezet. Morse avad n'he-deus splannet muioc'h, eged e-doug ar skol-mañ. Biskoaz dén n'e-neus komzet gwelloc'h na sklêrroh euz kudenn ar yez ha kemend a zell outi. D'e heul e pourmenom gand dudi e-kreiz he finvidigeziou, he distagadur, he lennegezh. Eur yez n'eo ket eun Doue, méd eur beñveg dispar da vab-dén da zeveni youl Doue warnañ ha war e ouenn.

Kudenn ar yezou bihan, displeget en eun doare beo ha nerzuz gand *Korantin Riou* (3) a roio tro adarre d'an *Ao. Falc'hun* da zisplega talvoudegezh dibar ar brezoneg.

E brezegenn war ar Barzaz-Breiz he-deus taolet sklêrijenn war eur gudenn chomet beteg-henn gwall luziet.

(2) Diwar vremañ e heller goulenn digant M. Le Louz, B. P. 17 Brest, prezegennou an *Ao. Bihan* hag an *Ao. Paol* ar *Flem*. Ar gentañ 50 lur, an eil 60 lur. Paea dre dimprou.
(3) Moullet e vo studiadenn an *Ao. Riou* kenta ma vo gelllet.

Gand an *D^r Lebreton* on devez tro da houzoud petra eo eul levraoueg vrèzoneg. He hini eo, moarvad, gwella hini a zo e Breiz. Dizelei a ra deom petra 'hellfe beza levraoueg Landevenneg pa vo peur-renket ha peseurt levezon a hellfe kaoud war Vreiz a-bez. Deski a ra deom penaos sevel eul levraoueg, penaos he mired, ha pebez doujañs a dlefem da gaoud evid al levriou koz. Diskouez a ra deom neuze al levriou talvoudusa ha prisiusa e-neus en e levraoueg.

Landevenneg ! Galvet on-eus dres daou dad euz Landevenneg da zond da gomz deom : An Tad *Laurent* hag an Tad *Grégoire*.

Gand ar henta on devo kalz a blijadur hag a lorch o vond da heul or hantikou brezoneg, ken tost ouz ar han-iliz ma kreder emañ eno an eienenn anezo. Na pegement e klotont gand ar bedenñ, na pegen kaer int na pegen stag e tlefem... aza outo. En an ' Doue deskom anezo d'or bugale. Ra dregerno ganto on ilizou... An Tad *Laurent* a embanno e studiou war or hantikou brezoneg en unan pe unan euz niverennou « Pax ».

Gand an Tad *Grégoire* e teskom petra eo bet labour ar veneh e Breiz. Displega ' ra dirazom, war an danvez-se, e-pad 2 h. 30, eun daolenn souezuz. Gantañ e teskom ez oa e Breiz, araog an Dispah 19 manati euz Urz Sant Beneat; (ne chom anezo nemed tri : Landevenneg, Kerbeneat ha Kergonan); 18 manati euz Urz an Trapisted (chom a ra pevar : Boquen, Melleraye, Tymadeuc ha Campeneac); 10 manati euz Urz an Aogustined. (Ne chom hini ebet hirio.) Ouspenn, kouenchou diniver a veze kavet dre oll. (Ar studiadenn-mañ, pinvidig kenañ a vezo kavet e « Pax » en niverennou da zond.

En eun eil studiadenn, an *Tad Grégoire* a lavar petra eo, hirio an deiz, labour Breiz war dachenn ar misionou : eur misioner beleg war eiz a zo breizad. Ma rofe kement bro gristen a zo er bed, kement a visionerien ha Breiz, e-leh 12.000 beleg misioner, on defe 200.000. Goude e komz euz an Urziou frered ha seurezed a gas Bretoned d'ar misionou : peadra da rei lorch deom-oll.

Ar *Frer Stephan* kenoberour « Yez hon Tadou », a gomz deom euz pinvidigezh ar brezoneg. Diskouez a ra deom soniadur dibar ar gerioù evel « storlok, bourbouilh, flistra, kluka... »; pinvidigezh gerioù all evel « ruz-tan, teñval-sah, garret-hir, speredet-kaer... » Displega ' ra ive teñzor dispar an troiou lavar n'o deus ket o far e yez all ebet.

An *Doktor Tricoire*, euz Kastellbriant, eur Vendead, a bouezo dreist-oll war binvidigezh ar 'frazenn ha lies doareou ar verbou. Lies-yezeg evel ma 'z eo, e hell keñveria ar brezoneg gand yezou all evel ar Ruseg, an Alamaneg, ar Spagnoleg, ar Saozneg. N'e-neus ket ar brezoneg da ruzia dirazo. Perag avad rebech d'or yez mankou a herioù da envel traou nevez pa traou skianteg ? Daoust hag eñ hepken n'e-nefe ket ar gwir da implija ar gerioù etrevroadel implijet gand ar yezou all, evel « telefon, magnetofon, sinema, radio... » hag all ?

Ar *Frer Uguen* kenoberour « Me a zesk brezoneg » a zo ive eur yezoniour gouzieg. Gouzoud a ra an oll yezou keltieg, ha diskouez a ra deom an heñvelderioù hag an disheñvelderioù a zo etrezo. Brezoneg, Kerneveg, Kembraeg, Skoseg hag Iwerzoneg a zeu gantañ heb eil, m'eo eun drugar. Peur avad eh embanno, an *Ao. Uguen*, evid mad an oll, ar ouiziegezh a zo sanailhed en e benn, diwar-benn ar yezou keltieg !

Evid Istor Breiz, an *Ao. Bourdellès* a zo bet evidom eur helenner dispar. Kelenner war an Istor e skotach Lannuon, gouzoud a ra an tu da zisplega taolennou an amzer dremenet.

Teir gentel war Istor Breiz e-neus grêt deom, teir daolenn livet-flamm ma welem warno, evel war eur skrap sinema, darvoudou an Istor, beo, nerzus, kenteliuz. Hag e tenne diouto, evidom, ar henteliou, ar gwirioneziou a zere.

Ken plijuz eo bet e genteliou, ma 'z eo bet anvet, a unvouez, kelenner da viken or skoliou-hañv da zond.

Istor ar Vombard hag ar biniou eo bet lodenn ar Breur *Korantin An Her*, rener skol St-Joseph e Pempoull (C.-d.-N.) ha penn-rener eur bagad bugale brudet dre Vreiz a-bez. N'hellem ket kaoud na gwelloc'h nag hegaratoh kelenner. Bemdez e roio kenteliou biniou ha bombard ha beteg fin ar skol-hañv e-nevo diskibien greduz. Ra zavo d'e heul bagadou bugale e skoliou Breiz-Izel.

Or skrivagnerien vrezonég ne vezint ket ankounac'haet. *Job Seite* kelenner e skol-an-Aod, e Gwiseni, a daolenn deom labour kaer skrivagnerien Bro-Leon : al Lae, ar Gonideg, Troude, Milin, de Carne, Glaoda'r Prat, Tanguy Malmanche, Yann-Vari Perrot... R. Hemon.

Ar *Breur Cyrille*, kelenner el Likès, Kemper, a raio kemend-all evid skrivagnerien Bro-Gerne ; barn a ra oberou ar re vrasa anezo : Kerampuy, an Tad Maner, Gregor a Rostren, Kervarker, Jakez Riou, Yvon Crocq, Taldir... Drezen, Yeun ar Gow, Kervella, Helias, ar Moug...n.

Skrivagnerien Bro-Dreger a vo prezanted deom gand a *Aotrou Bourdellès*. Lakaad a reas da dremen dirazom, beo ha nerzuz, ar re wella anezo : Jehan Lagadeuc, Kerambrun, Luzel, Quellien... dreist-oll Erwan ar Moal, Berthou, Priel, Loeiz ar Floc'h...

Keuz on-eus e vijé chomet a-dreuz prezegenn an Ao. Meriadeg Herriou war skrivagnerien Bro-Wened.

Eur plas kaer a zo bet grêt, e-doug ar Skol-hañv, d'ar sonèrèz ha d'ar han.

An Ao. *Derian* rener kanerien Santez-Anna-wened ha kelenner eno er hloerdi-bihan, a zo eur mailh war ar han-pobl. Kana 'ra m'eo eun dudi e zelaou. Komz a ra kenkouz all. Gantañ on eus grêt tro ar c'hanaouennou pobl, kantikou, soniou, gwerziou... Eun eurvez gantañ a zo bet berr, re verr. Karet on dije chom er skol gantañ, kana gantañ, c'hoaz ha c'hoaz.

Med setu ar Mestr brasa war ar han, ar sonèrèz vreizeg : an Aotrou *Paol ar Flem*, eur Breizad diwardro Landreger, eur Breizad-meur hag a ra enor d'e vro, ha d'ar Bleun-Brug ive pa fell dezañ heb bloaz respont d'or galv. Beb bloaz her havom evel barnar e kenstrivadegou ar Bleun-Brug, hag er bloaz-mañ adarre, e-neus asantet, gand eur vadelez diapar, lakaad en or servich e anaoudegez hag e ouiziegez. Bez ez eo, *Paol ar Flem*, eur zonaozour gouzieg braz ha brudet a bell bro dre e labourriou sonèrèz warno levezon ha liou ar vroig a gar kement.

Komz a ra deom euz oberourien vraz ar zonèrèz vreizeg : « Eur zonaozour petra eo ? emezañ, nemed eun dén a gréd en Neñv hag a glask hen lakaad da ziskenn war an douar. » Lakaad ar Baradoz da ziskenn war an douar evid deom da zevel or spered hag on ene warzu Doue. Ar zonèrèz a zo evel eur yéz etrevroadel ha n'he-deus ket ezomm a heriou evid beza komprenet.

Displega 'ra deom, goude, oberou or sonaozourien vrasa : Bourgault-du-Coudray, Guy Ropartz, Paul Ladmirault, Vuillemin, Aubert, Jean Cras, Piriou, Peneau, Bafon, Bigot, Guillou, Baudevert... E-touez ar re yaouank e kavom Langlais, Jef ar Penven, Pondaven, ar veleien Goasdoue, Abjean, Derian... Meuli a reas neuze labour al lazou-kana e Breiz, par d'ar re wella a gaver e Bro-Hall.

Suna 'raem komzou ar Mestr gouzieg ha pa baouezas e oam oll leun a geuz d'e weled oh echui (4).

« Breiz dirag kudennou an deiz a hirio » a vo displeget evel ma oar hen ober, gand an Ao. *J. Le Duigou* penn-skrivanier er « Progrès » hag er « Courrier ». Eur mes'r eo, e gwirionez, an Ao. Duigou, da zisplega kudennou, zokén

(4) Goulenn ar studiadem-mañ digand M. Le Louz, B. P. 17, Brest, en eur lakaat 60 lur timbrou el lizer.

ar re zièsa, ar re luzieta. Gand eur spered sklér, tarza 'ra e venoziou skeduz-flamm. Urzia 'ra ar hudennou, sacha 'ra an evez war ar re bouezusa : kudenn ar yéz, kudenn an amzeriou vak, kudenn ar boued pemdezieg... Eur gaozeadenn fetis leun a gelennadurez hag a vo embannet en he fez.

An Ao. *J.-M. Guilcher* kannad ar C.N.R.S. a zo eur mestr all ken gouizeg. Eur mouse'hoarz hegarat atao war e zremm, displega 'ra e zoñjou gand eur vouez dudiuz. Komz a ra euz an dañsou, dañsou Breiz, dañsou an eureujou. Lakaad a ra beo dirazom, an eureujou evel ma vezent grêt gwechall... « Dañs ar boked », « dañs ar beurien » na pegen leun ne vezent ket a skoueriou kaer hag a genteliou pinvidig : Lezenn ar garantez o skedi laouen-flamm da zeiz kaer an eureujou.

Jos Doare euz Kastellin n'eo dianav da zén ebet. Eur maqt eo da zisplega savaduriou kaer 'or Breiz. Hen ober a ra gand gouziegez, tan ha karantez.

Goude beza e glevet, pep hini a hello lenn e kizelladuriou eun iliz, eur chapel, eur halvar. Euz an oll draou-ze e komz deom. Mond a reom d'e heul da Lambader, da Vodiliz, da Lantrouarne, da Verven.

Komz a raio deom c'hoaz, goude, pell hag hir. Digeri 'ra on eneo da gaerder an arz, ha pa baouezo e chomim skoet gand e gomzou.

Georges Merdy a zo euz ar memes ouenn dud. Entanet beo ha nerzuz, digeri 'ra dirazom teñzor ar hoariva diwar teñzor on lennegezh, or hontadennou, or hanaouennou. Komz a ra, méd dreist-oll hoari e-unan ha diskouez penaos ober. Kenteliou e-leiz da denna evidom evid kentelia ha didui or bugale.

Setu eun tañva, eun tañva dister euz ar pez m'eo bet Skol-hañv ar Bleun-Brug savet ha renket gand *Visant Seite*, gand aked braz heb damant d'e boan.

Ra vezo trugarekaet amañ, an Ao. *Le Gat*, rener skol Sant-Yann-Vadezour da veza feurvezet on digemer gand kement a galon vad. Bennoz Doue d'ar *Fre-red* o-deus e skoazellet, d'ar skoliou all euz Kastell-Paol hag o-deus lojet ar skolidi : *Skol an Ursulinezed*, *Ar Garantez*, *Tadou Haïti*, *Skolach Kreisker* ha d'an Ao. *Appéré*, Person Kastell. Bennoz ive d'an Ao. de Guebriant, d'an Ao. Leal, Ensellour an Eskopti d'ar Frer Victorin ha d'ar re-all o-deus or gweladennet.

Bennoz Doue dreist-oll d'ar prezegeerien ha kenavo da vloaz. **Eno Edon.**



Kelh-Keltieg Lokorn, lidet gantañ e 10^{vet} bloavez.
(PHOTO « PROGRÈS »)

saoud lambaol

Bouchig bioc'h Fanch Kerzivoret

Biskoaz n'am eus gwelet eur vioc'h par da Vouchig, bioc'h Fanch Kerzivoret. Ruz ha gwenn, kerniel sounn en ér, daoulagad doun, leun a deneredigez ! Fanch a oa koz. N'en doa den ebet mui. Beva 'rae en eun ti soul, ha kraou Bouchig a oa e kichen.

Fanch a oa eun den mat. N'am eus klevet morse den o lavarout an disterra droug anezan, ar pezh a zo ral, zoken e Lambaol.

Koz 'oa Fanch, koz ha paour. Met eun teñzor en doa: Bouchig. Leun a lèz a veze ganti, leun a amann ive, met ha goude ma ve ganti nebeutoc'h a lèz ha nebeutoc'h a amann, e ve bet koulskoude eun tenzor a vioc'h.

Ar mor a deue gwechall betek bourc'h Lambaol. Abalamour da-se ar geriadenn savet p'oa aet kuit ar mor a zo bet hanvet Kerzivoret.

Met Kerzivoret n'eo ket dizouret, hag ar straed, er goañv, a zo evel eur ster.

Met peuri a sav, avat, a bep tu. Ha Fanch n'en doa tamm poan ebet o kaout boued d'e vioc'hig !

Bouchig a oa sot kenañ gant Fanch. Ne blije ket d'ezhi beza strapennet. Ha pa 'z ae he mestr diouz ar park, e c'hourveze ha ne zebre mui ! Bleujal a rae kement ha ma c'helle evit e c'hervel.

Fanch a zizroe, en eur c'hrosmolat eun tammig, met dizale ec'h en em lake d'ober allazig d'e Vouchig ha da gonta d'ezhi leun a draou.

An dervez doanusa evit Bouchig 'oa ar sul. Diouz ar mintin e c'helle kouskat war he c'holo fresk, en eur chaoket rabez. Met goude lein nag e kave hir he amzer, ar paourkz bioc'hig !

Fanch evel ar c'halz eus gwazed Lambaol a gare mont da c'hoari galoj pe da c'hoari ar c'hilhou. Ma n'en dije karet nemet c'hoari e ve bet mat an traou, met evel ar c'halz eus gwazed Lambaol ive e kave mat e vanne.

Ha Bouchig, debret ganti pell-zo he suiad a jome er park, inouet maro !

Nao pe zek gwel, o ya, da vihana, e torras he su — nann evit mont da laerez evel m'her gra ar saout all — nann ar vioc'hig vat a rede da glask he mestr, evel m'her gra ar chas. Betek ti Job Provost ez ae awechou, Bouchig !

Kenta veze klevet, e kreiz ar Jolori, eur vioc'h o vleujal harp en nor, pe eur wech zoken e ti Aogustin, e kreiz an ti. « Sell, Fanch, en em gavet da gi ! »

Er penn-kenta, Fanch en deveze eun tammig méz !

Met ar re all a deue o merc'hed allies d'o c'herchat. Hag ar merc'hed a ra gwasoc'h eget bleujal, pa deont da glask o gwazed. Bioc'h Fanch a oa ken ohentil, en o c'hichen. Ne roe ket d'ezañ a bep seurt anoiou-laboused, ne gemere ket ar vaz gantañ. Nann ! frota 'rae he fenn ouz e jiletenn — evel evit pokat d'ezan. E-giz-se e tiefe ar merc'hed ober pa deont da gerc'hat o gwazed en tavarniou !

Ya ! abenn ar fin, gwazed all Lambaol o doa avi ouz Fanch — a deue da staga e vioc'h e kichen an nor, evit dont da eva eur banne all araok mont d'ar gêr gant e Vouchig !

Awechou pa veze bet glao, an hent a veze riklus ! Fanch a goueze ! Hag eur wech bennak skuiz-marro, ne c'helle ket mui mont araok hag en em roe da gousket e toull eur c'hae.

Stréd Kerzivoret a zo tenn d'ar re goz, va bugale !

Pa chome a-zav he ferc'henn, Bouchig a c'hourveze en e gichen, hag a veilhe wannañ ! Na pebez bioc'h !

Ya, met ar saout a zo evel ar merc'hed ! Ar re wella anezo ez eus eun dra bennak da rebech dezo !

Awechou e zeus tro da veza nec'het o welout doareou ha gizioù saout a zo !

M'em eus sonj p'edon bihan e oa eur vioc'h e ti Jobig Fanchig, na c'helle ket gwelout eur volotenn hep he lonka ! Eur vioc'h vat a-hent-all !

E Sant-Pabu em eus anavezet unan, ha n'eus fors e pelec'h e veze, a dorre an holl stagou, pa wele karr-dre-dan ar c'higer, evit redek war e-lerc'h ; eun all hag a zebre an dilhad ; eun all, eur vioc'h dreist, eus Landegarou, ha na yae morse da eva an dour skler ha fresk a red eus ar feunteun, met, dour loudour, dour fank ar poull, gwelloc'h ganti dour Javel eget dour eñenn.

Ma welit eun deiz ho kwrég oc'h en em lakat da eva lèz tourgouilh e-lec'h eva rouzig, c'houi ! lavaro : « Hopala ! emañ ar gwiad kivnid oc'h en em lakat da daga an doenn ; poent eo teurel evez ! »

Ar saout evel ar merc'hed a c'hell koll o fenn, ha p'o gweler o kemerout gizioù distrantel eo gwelloc'h fakat evez.

Bouchig he doa eur c'hleñved souezus ! Ne c'helle ket gwelout eur penn sala-denn hep en em lakat da vleujal, gant ar c'hoant d'hen debri ! Fanch a rae dezi plijadur atao pa c'helle, met saladenn ne vez ket atao, dreist holl en tiegeziou bihan.

Dre c'hras Doue Fanch en doa amezeien vat. E Kerzivoret, d'an ampoent e veve Sezig, Marivon, diou galon aour, a vaouez ! Gant an Don ive « ez edo » deuet mat Fanch, hag « ez edo » atao digemeret mat pa dae da glask saladenn !

Met na pebez istor en em gavas gant Fanch Kerzivoret abalamour da zaladenn. Fanch en doa eun tammig pañsion, hag eur wech bep tri miz ez ae da Witalmeze d'he zouch.

Ha ! na pebez dervez kaer eo hennez an dervez-se evit ar vartoloded hag ar soudarded koz pe evit o intañvezed.

« Pevar gouel-berz a zo er Frans », ya, unan bep tri miz ! Sofj am euz ouz unan ha ne lavare grig da zen. Mont a rae gant e vioc'h, pe gant e garrigell en eur sellout a-gorn ouz an dud.

D'ar penn-se eo. — Ya, emezañ ; hag ez ae soublet e benn.

Hañ ! brao an amzer ? — Ya, emezañ, o klask kuzat e benn etre e skoaziou mezek, daoubleget.

Met deiz ar bañsion e lamme a bep tu evel eur c'havrig, e tañse, e tae da glask trabaz ouz merc'hed ar poull, ouz pôted ar skol, e kane war an hent bras, e pae da eva d'an holl, en ostaleriou, ha ne darde tamm da varvailhat.

D'an deiz warlerc'h edo darre en e grogenn evit tri miz !

Fanch evel ar re all, a veze laouen kenañ d'an deiz-se !

Met ne pebez dervez inouus ha doanuis evit Bouchig !

Eun deiz e torras he chadenn hag e teas, d'an daou lamm ruz, he lost en ér, ebiou Kergongar, da Witalmeze, warlerc'h he mestr.

Gwitalmeze a oa neuze oc'h en em lakat d'ar c'hiz nevez, diwar goust Porsaliz, Lambaoliz ha Santiz-Pabu. Gwitalmeze, truez em eus outi ! Nag eo kouezet abaoue ! En eur goll Porsal he deus kollet he diwesker ! Penaos en em baka ? En eur zistaga Kerinkunv, ar Straejou diouz Lambaol ! Tud Kerinkunv hag ar Straejou n'eo ket graet ganto. Karout a reont Lambaol, ha tud Lambaol a gar, a bell-zo, o familhou bet atao ken mat. Eun deiz, tud Kerlanou, pa n'o d'o ket ezomm da garga o boutou ha d'ober lamm Sant Alar evit treuzi ar Froud, a deuo da Lambaol, tiegeziou bras ar Menez en em stago ouz Treouergat. Paourkz Gwitalmeze ! Perig, va c'hama-lad a wechall, deuet da veza eun doktor brudet, en deus tennet diganti he aochou ! Petra chomo ganti ? « Treompan da vernika, ha Gouranou da velfeta » ! Neuze, itronezed Gwitalmeze ne lavarint ket mui, douetus bras, d'ar bôtred yaouank : « Da Sant-Pabu da glask eur vaouez » ! Evelato n'emaout ket mat !!! Ne garan ket klevout lavarout traou diwar-benn Porsal, bro va c'havell, Lambaol, bro va yaouankiz, Sant-Pabu ar barrez vat he deus va rentet ken eürus. D'ober petra klask mirout ouz re all mont da gutuilh an eürusted en toull-se ?

Pourkez Gwitalmeze nag eo kouezet abaoue !

Tiez nevez a save, hag eur marc'hadour legumaj en doa graet war e di eur prenestr bras, da ziskouez d'an dud ar chalotez, ar c'haol poum hag ive ar saladenn. Ar pezh ne gomprenan ket eo, perak, a-dreñv kein al legumaj, en doa lakat gwer mellezour ?

Ar merc'hed yaouank a stage, e Gwitalmeze, da lakat ruz war o muzellou, ha da Wener-ar-Groaz diweza, an aotrou Person goude beza roet ar groaz da bokat, a gavas d'ezañ 'oa en em gavet eur burzud. « Gwad war e damm lien gwenn !... » Ruz-muzellou, oa ! hini marc'had mat, rak an hini a implije merc'hed Sant-Pabu ne zistage ket !

Marteze ar marc'hadour en doa c'hoant renta servij d'ar merc'hed, evit lakat liou war o muzellou, renka o bleo dindan o zog, pe gwelout an dud en tu all en eur drei d'ezo o c'hein ? Ne welan ket en holl ! C'houi marteze a gompreno gwelloc'h egedoun !

Bouchig a dardas a-grenn dirak ar prenestr. « Saladenn ! saladenn ! » Tostaat a reas, he fri, ha petra welas ? Eur vioc'h en tu all o vont da zebri ar saladenn he doa kement a c'hoant da gaout.

Ne oa ket hir an abadenn, m'hen asur d'eoc'h ! Bouchig a soublas he fenn, ha boum ! gant he c'herniel en arag e sailhas war ar vioc'h all ! Ar gwer a strinkas a bep tu, gwer ar skiasenn, gwer ar mellezour. Bouchig he doa bet ar saladenn. Gwad a ruihe eun tammig war he choung, met petra an dra-se, e kichen ar saladenn ken c'houek, ken didanus !

Merc'hed an ti, spontet, a oa nijet kuit. An dud a zirede a bep lec'h, an arche-rien, ar bac'her.

Bouchig a bakas eur saead ha ne grompréne ket perak ! Galleg-saout Gwitalmeze eo a gomzed dezi koulskoude !

An hent a oa bremañ leun-eked a dud, o klask gouzout da biou oa ar vioc'h. Fanch a oa sebezet o welout dirazañ ar boblad tud-se. « Eun interamant, a sonjas ! »

Met pa welas ! Pa welas ha pa gomprenas ar paourkêz Fanch !

« D'in-me ar vioc'h », emezañ d'an archerien ! ha paea rin. »

Ne vourveas ket e vioc'h en holl ! Paea a reas, ha paea kër. Tud Gwitalmeze a oar chacha !

Gwapeüs int war ar marc'had, hag epad m'edo o vont kuit gant e vioc'h, an holl a oa o c'hoarzin dezañ !

Ar pourkêz Fanch ! a-vec'h ma chome gantañ arc'hant eur banne, a evas war douar Lambaol, er Pont. Ar c'houerenn eno a droc'h an èr fall !

✱

Bouchig evel m'he dije komprenet he doa laket e fero'henn da goll tri miz pañsion. Chentilloc'h eget biskoaz e teuas da veza, ha ne c'houlennas ket mui à zala-denn. Morse mui n'en em zistagas evit mont da Witalmeze... da Lambaol hepken da zui, da glask he mestr, ha c'hoaz oa kalz furoc'h !

Eun daou pe dri bloaz goude, Fanch a gouezas klañv, hag a rankas chom en e wele. An dud a lavare ne zavje ket mui ar paourkêz koz !

Bouchig ne felle ket dezi mui debri, nann, zokén saladenn ! Treut gagn e teue da veza.

Hi, ive a oa klañv, abalamour m'oa klañv he fero'henn !

Eun deiz, e miz Gouere, e oa strapennet en eur park e kichen ar c'harpont. An heol a suilhe ken tomm ! oa ! A greiz holl Bouchig a reas eul lamm, a dorras he su, a yeas e breskin, a strinkas an drav dreist ar c'hae, a gemeras ar strêd, a yeas a-benn e moger Jan an Douz, a daolas war e lin eur c'harr e ti Jobig Fanchig, hag ar c'hlaourenn o tont eus he ginou a gemeras ar strêd-zoun a ya da Gerzivoret.

Er poull edo an Douz ha diou vaouez all, bep a dog kolo ganto. Bouchig a sailhas warno, hag, hop ! hop ! hop ! o zeir en dour, tokou, kachedou hag all ! hep m'o dije bet amzer da lavarout eur gër. Met ne chomfent ket pell er poull. Kerkent ha divorflet edont d'an daoulammou, an dour o tivera diouto, o youc'hal e-kichen ti Pèr ar Fourn : « Bioc'h Fanch Kerzivoret a zo penn-follet ! Bioc'h Fanch Kerzivoret a zo aet e tig ! Va Doue ! Va Doue, prest 'oamp lazet ! »

Unan a yeas da zihuna ar Person a oa oc'h ober e gousk merenn. Sevel a reas, hag ez eas buan da Gerzivoret, leun a dud war e lerc'h, gwazed war gorf o roched gant kerdin, merc'hed gant bizier, hag e-leiz a vugale.

Bouchig, en em gavet a-benn-herr e Kerzivoret, he doa torret drav an Don, daou pe dri fenestr, hanter vastoufet daou bemoc'h. Bremañ edo e foennog Yann an Dreñv, o tic'hagni taoliou kerniel gant ar gwez, gleb-dour-teil o c'houezi, an eonenn o tont eus he ginou. Den ne c'hoarze, an holl a oa trist-maro. Bouchig a blije kement deomp holl, d'comp-ni dreist-holl, bugale, a gare mont d'ober dezi allazig p'her gwelemp e kichen Fanch.

Ha Fanch ! Fanch a oa gwall glañv. Na pebez rann-galon, pa c'houezfe !

Lambaoliz a zo tud karantezus, hag a gompren ar boan, tud truezus, tud hag a gomprenn peur c'hoarzin ha peur arabat ober gwap !

Eur vaouez pe ziou a ouele. « Jezuz ! Jezuz ! ar paourkêz Bouchig, eur vioc'h ken mat all... »

Ar « veteriner » a oe galvet hag a lavaras he doa paket Bouchig eun taol-heol. Arabat he lakat er c'hraou, he lezel da redek en eur porz mogeriet mat. Ne roas ket kalz a fiziañs e pafe. Gwella 've bet d'ober, war a lavar, oa he laza, met ne c'helled ket hen ober : Fanch n'en dije ket aotret laza e vioc'hig !

Eur porz mogeriet mat ! Sofjet e oa dioustu e porz skol ar hôtre. Ar skolaer a oa aet kuit rak-se 'oa eas he lakat eno.

Nag a boan a oa o kabestra Bouchig, o lakat ereou war he zro, ouz he bonta wardu ar skol. O ! gwelloc'h ganin rei peoc'h war ar veaj poanuz-se rak, daelou a deu c'hoaz em daoulagad o soñjal er pardaez-se !

Ar bole'ou a oe serret, an noriou prenest, ha Bouchig lezet he-unan.

Ar pardaez a oa kaer, met pennou tud Lambaol a oe teñval, evel e klañv. Ma ni, zokén, ar vousetal, e-lec'h mont da c'hoari goude koan evel en derveziou all, a gavas gwelloc'h mont dioustu d'hor gwele !

Diouz ar mintin en deiz warlerc'h, Lambaoliz a gavas dor porz ar skol bruzunet, ha Bouchig ebet mui !

✱

Er Rufa, paotr ar « gar » a oe hanter immobil ! O, n'eo ket gant al labour ! Pevan « dreñ » bemdez ! Me n'oun dare petra c'hoarie gantañ, met pell-zo an dud a lavare e oa aet eur geihenenn en e empenn !

Poan en doa o sevel diouz e wele, ar paourkêz paotr, evit diambroug treñ Gwitalmeze hag hini Lesneven, en em gave en hevelep amzer, koulz lavarout, er Rufa !

D'an deiz-se edo adarre diwezadik ha pilpouzet e zaoulagad ! Na pebez penn a reas ar paourkêz dén pa welas war an hent houarn, e-lec'h ma tremene an daou dreñ,

eur vioc'h gourvezet. Mont a reas en eur gounnar spontus, met kaer en doa youc'hal, rei taoliou botou lèr d'ar vioc'h, houmañ ne rae van ! Gervel a reas tud d'e skoazella ! Ne deuas dén !

Treñ Lesneven a oa o tont. Sin a reas. Ar marc'h-du a chomas a-zav, met en em lakeas da zutal. Treñ Gwitalmeze a raes heñvel.

Ha neuze, ar paourkêz paotr, a oe lavaret dezañ meur a-dro e vije tennet digantañ e garg, a deuas dezañ eur soñj iskit. Mont a reas d'ar red en e di, hag e teuas er mêz gant eur fuzuilh hag eur sac'had tennou. Hep marc'hata, eus e-gichen, e tennas e penn ar vioc'h !

Klemmadenn Bouchig a oe ken skitrus ha ken doanuis, he sell ken truezus ma reas paotr ar gar eur skrijadenn ha ma kollas ar pez a chome gantañ a skiant vat.

En eul lamm ez eas a-c'haoliad war gein ar vioc'h varo, e lakeas tennou en e fuzuilh hag e youc'has d'an dud a oa lod anezo diskennet : « Holl en treñ pe me ho lazo ! »

Eun tenn all a dregernas !

Aes deoc'h gouzout ne chomas dén da zellet.

Paotr gar ar Rufa, war gein Bouchig a gane : « Digodo-ma-dondo !!! »

C'houi a c'hoarz bremañ, met ma vijec'h bet en treniou-se, ho pijs graet, evel er all, en ho lavreg !

Kristof, rener treñ Gwitalmeze a oa finesaou en e gorf. Gellout a reas, a-dreuz ar parkeier, mont betek Boharz, evit lavarout d'an archerien dont buan d'ar Rufa !

An archerien a deuas hag a chomas eur pennad mat nec'het maro ! Tostât a oa en em lakat e riskl da veza lazet, rak bez ma kane a-bouez e benn, paotr ar Rufa a zigore mat e zaoulagad, ha bep tro ma wele eur skeud : « baof ! »

Peder eur horolaj a dremenas, peder eur hir m'hel lavar deoc'h ! Den n'en doa c'hoaz kavet penaos en em denna eus an istor-se. Mestr an archerien a oa warnez gervel soudarded euz a Vrest, pa lavaras dezañ eun archer, ginidik euz Sant-Pabu (eno, m'hel lavar deoc'h ez eus tud hag o deus eur c'harrad troiou ijinus en o fenn, hag an archerien ginidik achano). « Paotr ar gar, emezañ, ma ve digaset dezañ eur vioc'h veo, her c'havje gwelloc'h eget unan varo. Kasomp davetañ unan veo, kentoc'h meur a hini, evit ma c'hello dibaba. M'hen asur deoc'h, e valeo, hag e c'hellimp e baka ! »

✱

Wardro ar Rufa ez eus tiegeziou gagn. An archerien a lavaras e ve paet ar saout lazet ha paet mat. Dizale e oe gwelet oc'h en em gout war an hent houarn eun ugent bioc'h bennak ! Ar veajourien a oa sabatuet. « Evit bremañ, a zontjent, n'ez aimp ket mui ac'halenn ! »

Paotr ar Rufa, e-lec'h tenna, a youc'has : « Sell-ta ! Saout... saout beo ! Unan d'in-me ! Chea ! Chea ! » hag e lammas war gein an hini a blije dezañ. Met ar vioc'h na oa bet den morse war he c'hein a savas he fenn-adreñv. Paotr-gar ar Rufa a lezas da goueza e fuzuilh evit kregi en he c'herniel. Hag ar vioc'h gant ar foeltr d'an daoulammou betek an hent bras.

Korf Bouchig a oe tennet diwar an hent-houarn. An treñiou a yeas da Vrest. Paotr ar gar a oe kaset d'an ospital da Gemper.

An « Depech » en deiz warlerc'h a gontas an istor da dud Lambaol. Eur poltred a oe zoken war ar gazetenn ! Diskouezet e oa da Fanch. « Va bioc'h koant ! Va Bouchig-me ! » hag e troas e benn warzu ar voger ! Araok an noz edo maro !

Mab an Dig.

Buhez an Ao. PERROT

Prenit diganeom « Buhez an Ao. Perrot »,
bet savet gand an Ao. Beleg POISSON.

Eur vuhez eo hag a renkfe beza
e kement levraoueg a zo e Breiz.

850 lur ar pez.

Skriva deom.

Bro-Bortugal hag an Indez

Ano 'zo bet meur a wech er c'hazetennou euz an tabutou savet etre Bro-Bortugal hag an Indez diwar-benn an nebeud douarou a jom e-dalc'h Portugaliz war aochou an Indez. Sonjet em-eus e plijfe deoc'h, lennerien, gouzout ar perak hag ar penaos euz ar gudenn-se. Desket ho peus er skol e oa en Indez pemp kêr dindan banniel Bro-C'hall. Ar c'hêriou-ze a zo bet roet d'an Indez n'eus ket pell. Bro-Bortugal, avat, a fell dezi dere'hel penn da Indeziz. Ni 'zo' vont da weled amañ perak n'eo ket heuliet skouer Bro-C'hall gant ar vro vihan-se.

E dibenn ar XV^{vet} kantved, pa rene an Dukez Anna e Breiz, e oa taget kristenien ar Sav-Heol gant an Durked, Muzulmaned taer a oa deut al lano anezo betek harzou an Alamagn. Edo ar spont o rén euz ar Pologn betek an Itali. Ne oa surentez ebet evit ar bagou a yae dre ar Mor kreizdouar (Méditerranée), ha diés e oa da dud an Europ prena ar marc'hadoueziou evel ar pebr hag ar sukr hag a zeue euz an Azi. Ar Pab en devoa aozet eur brezel santel (*Brezel ar Groaz*, evel ma lavared neuze), hag a c'hwitas. An dud keiz euz an amzer-hont en em c'houlenne en o anken piou a vefe gouest da herzel ouz ar reverzi turk hag a ginnige lonka ar Gristeniez a-bez.

Hogen, dres d'ar mare-ze, e oa Portugal leun enebour touet da lezenn Vahonet. Brezel kriz a rae ouz ar Vuzulmaned er Marok. A-hend-all, martoloded dispont hag ampart eo bet Portugaliz a-viskoaz. Dizoloet o devoa holl aochou an Afrik e-doug ar XV^{vet} kantved. Fellout a reas d'ezo ivez kavout an hent a gase d'an Indez. O sonj a oa degas d'an Europ ar marc'hadoueziou o tont euz ar vro-ze hag a oa harzet gant an Durked e perzier-mor ar Zav-Heol. Eur zoni uheloc'h a oa ivez gant o roue : fellout a rae dezañ taga ar Vuzulmaned en eur goueza warno a-daol-trumm, peogwir ne oa pobl ebet evit dere'hel dirazo.

Setu perak e loc'has Vasco da Gama euz Lisbon er bloaz 1496, gantañ 3 lestr hepken. Eñ eo a voe ar c'henta Europad o vont dre vor d'an Indez. Meur a gapiten a yeas di en e c'houde, hag a-barz nemeur, o devoa krouet Portugaliz eur c'holori kreñv ha pinvidik war aochou an Indez. N'eo ket laza ha laerez hepken a reas Portugaliz eno. Prezeg ar Feiz a rejont ivez. Eno e labouras Sant Franzez Zavier, Patron ar misionou. Kalz paganed a voe badezet. Dimezou e-leiz a voe ivez etre Indeziz ha Portugaliz : evelse en em furmas tamm-ha-tamm eur boblad nevez en douarou-se, en eur gemmeska doareou-beva an Indez gant re an Europ.

Dinerzet e voe Bro-Bortugal azalek ar XVII^{vet} kantved, hag e kollas an darn vuia euz ar c'holoriou he devoa gounezet e moriou ar Sav-Heol-Pella. Hollandiz hag ar Zaozon eo a gemeras an douarou pinvidik-se. Nebeut-tre a jomas stag ouz Portugal : 3 c'hêr vihan : Diou, Daman ha Gôa, en holl 4.555 km² gant 650.000 a dud, katoliked an hanter anezo. Ar vroig-ze n'eo ket gwall-binvidik : n'eus bevañs a-walc'h evit an holl, ha ret eo d'ar wazed divrôa ha mont da glask labour d'an Indez pe d'an Afrik, e-lec'h ma 'z int micherourien ha devezourien onest ha kalonek. Ha koulskoude, pegen disheñvel eo stad an dud o veva en Indez Portugalat diouz stad an dud o chom e Republik an Indez, adkavet ganti he frankiz pa 'z eas kuit ar Zaozon.

Er c'hêriou dalc'het gant Portugaliz eo bet roet ar memes gwiriou d'an holl, hep goulenn ouz an dud o c'hlas nag o relijion. En Indez avat e welomp ar Vuzulmaned kaset kuit pe lazet, ar Gristenien heskinet.

— daoust da gomzou flour an Ao. Nehru. Rannet eo Indeziz e klasou — ar « castes » a reer outo e galleg — leun a zispriz hag a gasoni an eil evit egile.

« Stad Portugalat an Indez » n'eo ket eur c'holori, eur rann euz Bro-Bortugal an hini eo, gant ar memes lezennoù. Tud ar vro n'int ket gouezidi :

lod anezo a zo ken desket ha Portugaliz an Europ — hag a-wechou desketoc'h — Dont a reont da veza barnerien kelennerien, ofiserien en o broig ha zoken er Portugal. Anavezout a ran unan anezo, teñval e groc'hen, hag a zo barner e uhela lezvarn Lisbon. Skoliou, ospitaliou, henchou hag henchou-houarn, perzier-mor, hag all, a zo bet savet e-leiz, gant arc'hant roet gant ar vamm-vro. Pa welomp an holl vroioù o pinvidikaat gant sikour o c'holoriou, ar c'hontrol eo a c'hoarvez gant Portugal hag a ro arc'hant, bep bloaz, evit gwellaat stad an dud o veva en he douarou tramor : ha birvidikoc'h a-ze eo karantez an dud-se e-keñver Bro-Bortugal.

Setu ar vroig a fell d'an Ao. Nehru staga ouz an Indez divent ha paour. Ha petra a ra evit dont a-benn euz e daol ?

Armet en deus bandennou o deus kemeret dre hég eun nebeut keriadennou — enno 40.000 a dud — e miz Eost 1954. Redek a reas ar gwad. Hag abaoe, n'eus ket tu da c'houzout petra eo deut da veza an dud keiz euz ar bourgadennoù-ze. Ne fell ket da Nehru ez afe dén da lakaat e fri du-ze. Evelse ez eus milierou a familhou rannet gant ar glac'har, hep reseo kelou, abaoe bloaz hanter, euz o zud kouezet etre krabanou eun toullad lamponidi. E pep lec'h, en Indez, eo taget, ha drouklazet zoken, al labourerien genidik euz ar « Stad Portugalat », abalamour d'o fealded da Bortugal.

Ha koulskoude o doa prometet ar Zaozon, en o ano hag e ano Indeziz, ne vije bet morse lammet o douarou digant Portugaliz.

Petra a ra an Ao. Nehru euz ar skrid-emgleo-ze ? Petra a ra erfin euz ar gwir he deus pep pobl da gaout he frankiz ? Mar deo tud Gôa eur wir boblad — hag hen diskouez a reont dre o doareou-beva — peseurt digarez en deus an Ao. Nehru p'emañ o klask trouz outo ? Gwelout a reomp n'eo nemet pilpou-serez kement a lavar « abostol ar peoc'h », evel ma ra tud 'zo ouz an Ao. Nehru. Prezeg a ra ar peoc'h er-maez euz e vro ; e-barz, avat, n'eus nag enor na lezenn hag a virfe outañ da dizout e bal. Hogen, a drugarez Doue, n'en deus ket gounezet c'hoaz en e c'hoari gant Bro-Bortugal — pe gentoc'h, gant Portugaliz an Indez.

J. Cormerais.



LIZIRI ha KELEIER

Ar stummoù dic'hour pe dibersonel e Brezoneg.

« Biskoaz », eme an Ao. A.E., en eur pennad embannet war niverenn 8 HOR YEZ, paj. 38, « biskoaz n'em eus klevet na lennet ar seurt stummoù ; bez' a-walc'h e vije diouto en eun du-man bennak (klaoustre ez eo er Vourc'h-Wenn), hogen anat eo ez int ijinadennou euz ar gwsa : penaos e c'heller implij eun araogenn er stumm dic'hour, pa n'eus ragano dic'hour ebet ? Klevet em eus « en devezer » evit trei ar galleg « on a » ; ne oa na gwelloc'h na gwasoc'h eget deor... »

N'ouzon ket piou eo an Ao. A.E., hogen, d'am meno, e tle beza unan euz an ebestel-se, desket ganto ar brezoneg, hag a gred dezo n'eus nemeto hag a oar hor yez difazi. Int-i, d'o sonj, eo doktored ar wirionez ha mirourien ouizieq eur skiant na dle ket beza stlabez gant trefodach an dud dizek.

N'on ket bet morse er Vourc'h-wenn, na bet darempred ebet kennebeut gant hor c'henvroiz euz ar barrez-se. Met da-vihana, mar d-eo gwir, evel ma skriv A.E., e reont implij euz stummoù dic'hour en o lavar pemdezieq, e c'hellan diskleria dezan n'emaint ket o-unan o komz evel-se.

E Kleder ive eo anavezet an hevelep doareou hag en eul lodenn vras a Gerne, e Bro ar Rouziked dreist-holl. Ha, ma 'z int eun ijinadenn eus ar gwaso, e tle homan beza koz-douar, ken koz marteze hag ar brezoneg e-unan. Gant an dud aet war an oad o c'hlever an alieso, evel just, hag ar re am eus o desket ganto o divije bet breman ouspenn c'houec'h-ugent vloaz (Doue d'o fardono!).

P'o devez hor gouizieien bommou gallek evel ar re-man da drei: pour soi, garder à soi, de l'argent qui est à soi, h. a., e chomont berr ganti pe e rankont klask pemp troad d'ar maout. Hogen gant hor paour kaez brezoneg du-man, ne vezomp ket chalet gant ken nebeut hag e lavaromp diorbid-kaer: « Evidor an-unan; mirout ganeor an-unan; arc'hant hag a zo deor an-unan, h. a. ».

Evit gwir, kalz traou talvoudus a zo e levriou Vallée ha Roparz Hémon, e-touez meur a fazi degemeret breman, siouaz! da reolennoù sakr. Met, pa n'eus meneg ebet enno eus ar stumm dic'hour, e c'heller lavarout n'int ket c'hoaz klosk-tre, rak red eo anzav, neketa, ez eo heman a bouez bras.

Ha p'en devezer (ya! quand on a) eur varnedigez da zougen diwarbenn eur gudenn pe eun dra ha n'anavezet ket, e vez gwellac'h lezel al labour gant unan-all gouizielec'h.

Deor an-unan da welout hag hen e vezer barrek.

Y. ar Gow.

« Kozvoulterien ».

« Er pennad « Kozvoulterien » embannet e Bleun-Brug niv. 91 pajenn 18, eo bet meneget ganin ano « Al Liamm ».

Sed aman ar wirionez rik-ha-rik:

Pa 'z euas din, dre ar post, kelh-lizer A. J. R. e tremenas ennon ar zonz-man: Penaoz e-neus bet va chomleh? n'eo ket diwar roll koumananterien ar B.-B., emichans. Diwar hini « Al Liamm », marteze, pegwir eo A. J. R. unan euz kenlabourerien ar gelaouenn-se. Setu perag eo deuet dindan va 'fluenn ar frazenn bet kavet fall gand ar rener: ... « eur helh-lizer a zo bet skignet moarvad e-touez lennerien al Liamm », hep sonjal hirroh. »

Errata.

Lakaad « kanenno » e-leh « kanenn » er barzoneg « Vel Job an Dall »: B.-B. n° 91, p. 17, 28th linenn; hag « eskemm » e-leh « eskenn » e « kozvoulterien », p. 18.

Ganedigez.

Dorig ha Menaig ar Voyer hag o daou vab Yann-Bleiz hag Arzel a zo laouen o kemenn deoh ginivelez Meven, e Roazon.

Yehed ha buhez hir d'ar bugel nevez-ganet.

Priz Iennegel ar Varzed.

Priz Iennegel ar Varzed a zo bet gounezet, e Gorseedd St Brieg gant an Ao. E. Barzic, Renner-Skol gristen e Quedillac (I.-et-V.), a reas eno ive, eur gaozeadenn blijuz war an Ao. Vallée, skrivaniere ha yezoniour breizeg. Ra gavo aman, hor mignon, hor gwella gourhemennou.

Kelh-keltieg Lokorn.

D'an 2 a viz Gwengolo eo bet lidet gand pardon Itron-Varia Kelou-Mad, dekved bloavezh kelh-keltieg Lokorn bet savet ha renet ken mad gand an Dimezell Gaid Koadou a zo bet hag a zo atao ene beo ar c'helh. En devez araog, an Ao. Fave, Vikel-Vraz a reas d'ar yaouankizou, er patronaj, eur gaozeadenn gaer ha kenteliuz. Hen eo ive a renas hag a brezegas, en deiz warlerh, pardon I.-V. Kelou-Mad ha gouel ar C'helh. Meuleudi, ha buhez hir da Gelh-Keltieg Lokorn.

Pardon ar zonerien.

D'an 30 euz ar miz-man e vo e Gourin pardon ar zonerien, deiz pardon Sant Herve. Da 11 h. e chapel Sant-Herve, overenn-bred; da 15 h. gousperou. N'eus ket eur soner ha ne vo ket e pardon Sant Herve.

D'AR PAZIG EZ AN

(Kan-bale d'ar vugale.)

2. Deom da bourmen da Rosko,
Da brena kaol hag articho.
3. Deom da weled Montroulez
Da brena butun da Jakez.
4. Deom da weled kêr Landi
Da brena krehin da Jani.
5. Deom da weled Landerne
Da werza pillou d'ar Herne.
6. Deom da weled Plougastell
Da lonka sivi a rastell.
7. Deom da weled Lesneven
Da brena louzou d'ar boan benn.
8. Deom a-rôg fin an devez
Da weled Brest ar gêr nevez.
9. Goude 'z aim trezég ar mor:
Moarvad hor halon 'vo digor!
10. Hag e lammim en dour fresk
Da zeski neu evel ar pesk.
11. Hag e hellim en eur vag
Mond da Vro-Zaoz en tu bennag.
12. Ha pa vezim deut en-dro,
War an aod gwenn ni 'c'hoario.
13. Ha pa 'z aim d'ar gêr goude
Ni gousko brao en hor gwele.

Pôtr Treoure.



Ar re o-deus kemeret perz e skol-hañv ar Bleun-Brug e Kastell-Paol.

(FOTO LE JEUNE PLOUESCAT)